

JEZUZ HA BREIZ

G W E R Z

ANN OTRO SAND/ILUT

—
 —War don : « *S. Josef, pried Mari.* »
 —

D I S K A N .

*Tad Ebestel Breiz-Izel,
 Sant Ilut Traougeri,
 Pedet ann Dreindet santel,
 Pedet evidomp-ni.*

Sand Ilut, mignon Doue,
 Enn Breiz-Veur zo ganet ;
 He dad-koz a oa Roue,
 Ha merzer eo marvet.

He dad oa hanvet Bikan,
 He vamm Renguilidé :
 Tud pinvik.euz ar c'hentan,
 Tud a doujans Doue.

Kaset adaleg bian
 D'ar skolio gand he dud ;
 Enn Breiz ne vo ket unan
 Ken disket hag Ilut.

Arok bean da Doue,
Arok bean beleg,
Ilut zo bet d'he roue
Eur zoudard kalonek.

Brudet braz oa he hano,
Ha Roue Klamorgan,
D'hen zikour enn penn ar vro,
Hen kemeraz buan.

Enn keit se en euz klevet
Ilut mouez sant Kado,
Ha kerkent 'n euz dilezet
Ar bed hag he vado.

Goude bean beleget
Ha perc'hraet he studi,
'Tal Lanġarvan 'n euz savet
Eur c'haer a abatti.

Enon e teui bugale,
Oll vugale ar vro,
Da diski lezenn Doue
Hag ann oll skiencho.

Enon hon dije gwelet
Ar zend o studian,
Ar zend a oa 'vit donet
Eunn devez d'ar vro-man.

Enon, enn-mesk ar re-all,
'M ije gwelet gant joa
Leonor ha sant Tual,
Daou vab fur Koupaia.

Sant Samson, sand Aourili
Ha sant Gweltas Gwened,
Sant Magoar ha sant Divi
Enon 'zo bet zavet.

Gand ar c'hoant da welet c'hoaz
Eur wec'h he skolerien,
Da Vreiz-Vian e teuaz
Lec'h ma oant iskibien.

Enn Breiz-Vian e varvaz,
Enn koz vro he dud koz,
Hag euz kear Dol e savaz
Vit mond d'ar baradoz.

Gret ma vo enn Breiz-Izel,
Sand Ilud binniget,
Bugale fur ha zantel,
Vel ar re 'c'h euz skoliet.

Graz Doue barz ar bed-man,
Hag ann Env er bed-all,
E kleomp klask da gentan,
Vel m'hoc'h euz gret gwech-all.

Evel-se 'kefomp Jezuz
Enn devez ar maro,
Hag e vefomp evuruz,
Evel-d-hoc'h enn Envo.

IMPRIMATUR.

Brioci, 10 Junii 1881.

FRANCE, vic.-gén.

Kalon dous ma Jezuz, beet ma zilvidigez. (300 de ind.)

E Landreger. — E Ti AR FLEM, Mouier-Levrer.